

## FRANZ RENEVEZET

## GANT AR BREZEL VRAZ 1914-1915

*Ton : Pe gen kaer eo Mamm Jesus.*

## DISKAN

*at* E kreiz an anv, eun tarz gurun,  
Deut var Franz dioc'h ar Pruss var eun, *ouz*  
A ro dez-hi, n'eun taol dihun.

1

Marvet Jesus, Salver ar bed ;  
Joa vras gant ar Pharizianed ;  
He hano mui ne vo klevet.

2

D'ar zul Fask, an douar a gren ;  
Sevel 'ra skedus Mab an Den ;  
Gant spount a deac'h he vourrevien.

3

Franz, evel Jesus sebelliet,  
A zo laouen nevez savet,  
Dioc'h ar bez doun, leün a c'hened.

4

Enebourien kriz, n'ho herder,  
Da zatan ho deuz roet ho ger  
D'he laza mik, e berr amzer.

5

Liamet eo gant chadennou,  
Lez-hanvet gant-ho lezennou,  
'Vit kass da goll an eneo.

6

Ar vugaligou n'hellont mui,  
Er skoliou, n'em roi d'ar studi,  
Dindan lagad ar grusifi.

7

An dud da Zoue konsakret,  
A dre he diwreac'h difframet,  
Er broïou pell 'zo harluet.

8

An ilizou 'zo profanet,  
Da c'hortos beza peur-zarret,  
Laëret, pe zoken diskaret.

9

Distaget krenn dioc'h an Iliz ;  
Lamet he c'haloun dioc'h he c'hreiz ;  
N'hell beva nemet dre ar Feiz.

10

Kavet eo setanz Pons-Pilat,  
Gant an dud fall, leal ha mad,  
A lavar krenv : « varnomp he goad ! »

11

Siellet gant ijin he bez ;  
Noz-deiz diouallet gant evez,  
Franz n'hell ken distroï d'ar vuez.

12

Doue ne zic'han da veilla  
Ne varvo ket he verc'h hena,  
P'Hen'teuio d'he resusita.

13

Da viz eost, kurun ha luc'hed ;  
Var he billierou 'gren ar bed :  
An dud fall a zo straffillet.

14

Bugale Franz, n'ho zremenvan,  
En em zav oll guitibuhan  
Evit diskar ar Prusian.

15

N'euz ken kaoz a zac'hel-dia ;  
Ar paour, ar pinvidik a ra,  
~~En he bost, evit ar quella.~~

*dre ma hellont, vit ar quella*

16

Eun huvre fall eo ho deuz bet ;  
Mez evit mad eo tremenet ;  
Ha dont en dro ne raio ket.

17

<sup>(12)</sup>  
(Klenved)  
Skoet gant (klevet) ar Feiz kristen,  
E oant prestik da goll ho fenn :  
Sêtu m'eo torret an derzien.

18

En armeou, petra 'weler ?  
Soudarded dispount ha seder,  
O trugarekaat ho C'hrouer.

19

Du-ma, du-hont, var an dachen,  
Daoulinet ha pleget ho fenn,  
O reseo gras an absolvenn.

20

Niverusoc'h en offeren,  
Da zul, en ilizou distoën,  
N'eur vouela 'vel eur Vadalen.

21

Ho c'haloun leun ha garantez,  
En dro da Feunteun ar Vuez,  
A ro dez-ho eun nerz nevez.

22

Ar <sup>(1)</sup>(mistri) brezel uhela  
Eo a ra skuer vad da genta :  
Dourn Doue, sur, a zo ama.

23

A petra 'weler ~~er~~ ilizou ?  
Bemdez leun-barr an ilizou,  
Mintin ha noz, d'ar pedennou.

24

Kalz goazed ouz an Daol-Zantel,  
A renk uhel a renk izel,  
Betek-hen out-hi chommet pell.

25

Petra 'dremen var ar meaziou ?  
Tud da heul proesiounou,  
N'eur hirvoudi : « litaniou. »

26

Koz ha yaouank, e peb parrez,  
O pedi devot ar Verc'hez,  
An oll zœnt hag an oll œlez.

27

N'eo ket marvet ar Franz kristen ;  
Ar vuez, goude fallaënn,  
A red en-nhi c'hoaz penn-da-benn.

28

A drenv eta, falz doktored,  
Guir vreudeur ar Prusianed,  
Re bell oc'h euz hon touellet.

29

Kassit larkoc'h ho sorc'hennou ;  
Ho kevier hag ho plasmou ;  
Ni zal'hø da Feiz hon tadou.

30

O Franz, va bro muia karet,  
N'eun taol kount oc'h euz diskaret  
Framasouned, Prusianed.

31

Eurus ni ' gano brema  
Da Jesus ha d'he verc'h hena  
'Hed hor buez : « *Alleluia* ! »

DIVEZ.

  
*Saint-Pol-de-Léon.*

